



CANTIC AR GANANEEN.

AR GANANEEN.

MAB da David , dre excelanç ,
Dre c'hraç ho pet ouzòn truez ;
Gant eur sé crén va oll esperanç
A lacàn en ho madelez ;
Gûir eo e zoun ur Gananeen ,
Mes quittèt emeus Tyr , Sidon ,
Renoncet emeus crenn da Satan
Évit adori Doue güirion .

Va merc'h a zo meurbet afflijet ,
Hep caout eur moment a repos ;
Possedet eo gant an drouc-speret
P'ini e zourmant deiz ha nos :
Autrou , na vezit qet insânsibl
Eus e soan zo quer violent ;
Rae deoc'h ne zeus netra impossibl
Pa zoc'h mab d'an Oll-buissant ,
Caër oc'h eus sonjal va rebuti ,

Dti sprizout entent ouzin,
Me soutajo va mesmerenti,
Eus oc'h heuill hirra ma illin,
Me esper, d're va ferseveranç;
Va feiz, va importunité,
Ho constaign pr' vech, klop résistanç,
Da barea va infirmite.

Ebestel santel, me ho suppli
Da bedi ho Mestr evidon.
Ma neus pareet meur a hini,
Ne disprizat qet ac'hanon;
Nâ fel qet dezàn distrei ouzin,
E guein a dro din-me soudan,
Ha ne glasq nemet ober mez dia,
Elec'h soulagi va anqen.

AN ÉBESTEL.

Jesus a zisque, dre e zilanc,
Neus netra da accordi deoc'h,
Na né rit mui dezàn violanc,
Na importunit-àn pelloc'h.
Meritout a rit beza blamet,
Crial er guis-se var e lerc'h:
Lest-én en peoc'h ha paciantet,
Hac it da gonsoli ho merc'h.

AR GANANEEN.

Re vrás e zeo va affliction
Da lavaret sur e tufsen

Ne meus na mæz na confusion.
 Evit criak war boez va fenn.
 Ma na accordit din va reget,
 O presenti dezàn va c'hilenn,
 Me hoc'h heuillo hep manqout camet
 Betec percher Jerusalem.

AN EBESTEL DA ZOUE.

Autrou, ar vreg-mañ incomparabl
 A gri hac a ouel var ho lerc'h,
 O c'houlen gant ur feliz admirabl
 Eur c'hraç benac evit e mero'h
 Zo toutmantet gant an érouc-speret;
 Delivrit-y, mar plich gueneoch',
 Ma voezo e famill d'eolet
 En eus an ilern spont razoë'h.

Seuvui m'e c'hourdroueomp da dovel
 Ha d'lion dilezel da vont en hent,
 Gant aon na deufach'h d'e dilezel,
 E cri b'elloch' eguet qent;
 Ho pedi a ra haø ho pressi,
 Implich a ra peb seurt moyen
 Da zonet erbo d'oo'h aogagis
 Da gaout truez oyz e anqen.

DOUE.

Va Zad'en deteus va digasset
 Trezec a'hebl a Israël,
 Pera benac mazigia obliquet,

Ingrat, infidel ha cruel,
 Ne deo qet deuet c'hoas an amzer
 Da entent eus ar bayanet;
 Mes tenna fell din eus a zanger
 An danvad am boa dianqet.

AR GANANEEN.

Autrou, mezi, p'ini a adoràñ
 Humpla ma zeo possubl din,
 A nevez flam en ho supplian
 Da gaout compassion ouzin;
 Recour a illit din va buez,
 Ha lacat sin d'am oll dourmant :
 Va zicourit dre ho trugarez,
 Pe me varvo gant nec'hamant.

Da ur sant Mathurin qen ingrat,
 Da ur Vadalen debordet,
 Da ur vreg clan gant ar flus goad,
 Oc'h eus accordet o reqet;
 Nemedon-me, ta, Cananeen,
 Ne vezoz gueneoc'h refuzet;
 Abalamour ma zon payanez,
 Em lest en Preis d'an drouc-speret.

DOUE.

Greg, ho merc'h a zouffr ur sort angen,
 En puniton d'e sec'het;
 Mes ne lezin qet va judeviea
 Evit trei ouz ar bayanet.

Da nichun maro na **zeziràn**,
 Ne refuzàn, den eus va c'hraç,
 Mes inn dra injust bras e **cafen**
 Rei bara bugale d'ar chass.

AR GANANEEN.

Autrou, emezi, guir a leret,
 Ne veritàn pet ho para;
 Mes dre ho madelez infinit,
 Roit din ar bruzun anezâ,
 Pera benac ma zoun payanez,
 Plijet ganeoc'h ma testoumin
 Dindan ho tol, evel ur guiez,
Ar bruzunadon a goivin.

Ne c'houlennan neunet **ar bruzun**,
A goe eus ho tol d'an douar,
 Pere na refuzac'h da nicun
 Deos oc'h anevalet brutal.
 Me fel din en em humilia
 D'ho treid', a gorf hac a'speret;
 Ha ne scuizîn qet d'ho suplia,
 Qen n'am bezo let va reqet.

DOUÉ.

Greg, ho se hac llo perseverans
 Ho cri, ho c'huanadou bir,
A deu da drec'hi va résistañ :
 Bezet grêt erves ho lezir.
Ca'z mui eguedoc'h-hu e careñ

Guelet ar sif eus hoc'h aau; · · · ·
 Mes ur blijadur yras e cavàn
 Clèvet tad humbl ouz va sedi.

Gant un êr rust e comzen ouzoc'h,
 Evit hoc'h approuv gael a ze,
 Petra bepac m'am'boa sonch ouzoc'h,
 Gant truez eus, hoc'h adversité.
 Evit va gloar hac eu ho profit
 Emeus grêt van d'ho refusi,
 O tisquez deoc'h ne ell den gounit
 Ar victor anez combati.

Ne garan qet un ene clouar,
 A deu prest d'en em relachi,
 Haøza goe e gourach d'aa dover,
 Pa zaleñt d'eu exaudi.
 Gouennit, pedit, importunit,
 Pa vezoc'h en hoc'h orëzon;
 Evel'se e cresqo ho merit,
 Hac e c'honefet va c'halon.

Calz tad a ziles o fedennou,
 Pa fel din exerci o fe,
 Ha pa guzan va sclerigennou,
 Evit ma elasqfoot gnel a ze;
 C'hioni a zisquelo, dre ho serveur,
 Ho fe hac hoc'h humilité,
 Ne eller accordi nep faveur
 Nemet dre importunité.

It en pêoù'h, ha 'sechit' ho taelou,
 Obtenet oc'h eus ho reget ;
 Ho merc'h a voar dija ar c'hêlou :
 Yac'h eo a gorf haec a speret.
 Ouspenn m'aù eus roet dei yec'het,
 Roet emeus grâc deoc'h bo tlou ;
 Mes tec'hit a doues ar bayonet,
 N'adorit mui o douedou.

AR GANANEEN.

Autrou, ho trugatecât a ran
 Demeus hoc'h oll madalezou,
 Oc'h anavezout a zezirân,
 Hac heuill hoc'h oll gourc'hemennou.
 Da devi an ælez eus an ênvou,
 Da devi an dud yaouanq'ha coz
 Da gana hoc'h oll meuleudiou
 En douar hac et bârados.

Neuze gant e merc'h voa eruet :
 Va mam, echu va nec'hamant ;
 Ar yec'het a zo din-me rentet,
 Ne meus mui aon deus va zirant ;
 Chasseet ez eo peñ diouzin,
 Mes piou eo va liberateur ?
 A vijen e garet a fel din,
 Hac e servicha gant ardeur.

Ar guir Vessi, pini zo deuet,
 Zêz va merc'h, ho madoberour ;

Ennes en deveus ho telivret
Deus a c'hrifou hoc'h adversour.
Eur beden aroset gant daelou
A zo agreabl bras dezàn,
Na n'en eus qet a greoc'h armou
Evit triomphi anezàn.

Consacromp hor c'horf hac hon eue
D'ar Roue bras demeus ar bed;
Evit nep poan nac adversite,
Ne scuizomp qet eus e garet.
Ne dransgressomp qet e lezennou,
Bezomp ato fidel d'e c'hraç,
Ma elsomp oll, goude hor peaniou
Er guelet en eñ fac-à-fac.

F. L. N.



à retrouvez, eus à Impr. LÉGAN.